

Carole ha Sandrine. Le Bail Merc'hed an dañs

Publié le 20 avril 2017 à 00h00

Modifié le 20 avril 2017 à 09h28

ANNA QUÉRÉ



« Treizour », un abadenn o veskañ dañs hengounel ha dañs a-vremañ, a vo dalc'het disadorn e Plozeved. E-touez an dañserien : div c'hoar gevell, sot gant an dañs.

Peadra zo da vezañ kollet gant ar merc'hed-se. Memes dremm. Memes mousc'hoarzh. Memes mouezh. Ha dañserezed o div. « Piv zo piv ? » a soñj an hini o paouez ober anaoudegezh ganto. « A-wechoù 'm bez poan c'hoazh ober an diforc'h ! », eme Gregory, unan eus o mignoned. Sandrine ha Carole Le Bail zo ganet e Tourc'h, nepell diouzh Rosporden : « ni zo merc'hed Kerne ! » emezo a-unvouezh. Tremenet o deus an div c'hoar o yaouankiz e bed ar festoù-noz : « e kelc'h Eliant' oamp kroget da zañsal da gentañ. Kemer a raemp perzh bep bloaz da aozañ an Nozvezh velen, un fest-noz bras hag a veze savet gant ar c'helc'h », a gont Carole, plac'h du he blev. « Plijus 'oa dañsal, met an dañs ne oa ket trawalc'h deomp. C'hoant hon oa da vont pelloc'h ha deskiñ brezhoneg, yezh hom zad. » Goude ur stummadur e ti Stumdi o deus kavet Sandrine ha Carole labour e Diwan : unan zo bremañ skolaerez e Montroulez hag eben zo levraouegerez e lise Diwan Karaez.

Dañsal atav

Chom a ra an dañs a-bouez en o buhez, met en un doare all. Goude pemzek vloaz e kelc'h Eliant, o deus klasket mont davet raktresoù all, pep hini gant he lusk. « N'em eus ket ehanet. Kendalc'het 'm eus da zañsal atav », a gont Carole. Gildas Sergent, eus kelc'h Korriged Ys e Douarnenez, a ginnig dezhi dont da zañsal asambles ganto. Dizoloiñ a ra ar vaouez yaouank un dro-spered disheñvel : « eno, ar preder zo pouezusoc'h eget ar jestroù pe ar pazioù », eme Carole. Sandrine, deus he zu, a oa chomet a-sav gant an dañs e-pad daou vloaz. He c'hoar a sach anezhi da zont e kelc'h Korriged Ys asambles ganti. Ur gwir cheñchamant eo eviti : « din-me eo bet diaes er penn-kentañ. Destabilizet on bet penn-da-benn », a gont Sandrine. Setu neuze merc'hed Kerne en em gavet e ti ar pennoù-sardin evit ur avañtur nevez.

« Treizour » : ar ganerien e-touez an dañserien

O pleustriñ emaint er mare-mañ war un abadenn zañs dreist-ordinal : eizh kaner zo war al leurenn gant un ugent bennak a zañserien, evit un abadenn o veskañ an dañs hengounel hag an dañs a-vremañ. Gwiskamant ebet, ar pezh a cheñch kalz ivez e-keñver an abadennoù a vez kinniget gant ar c'helc'hioù all. « En ur mod, ne c'hellomp kuzhat dindan ar gwiskamantoù », a zispleg Sandrine. Evit Carole ha Sandrine eo un doare nevez da welet an dañs hag an treuzkas : « ur mod all da vevañ ar sevenadur eo », emezo. « Savet eo bet an abadenn gant an daou leurenner, Cécile Borne ha Gildas Sergent, met leun a frankiz zo er framm-se », eme Carole. Hag eben o respont : « ar raktres a chom bev, bez e c'hell cheñch atav. » Un abadenn leun a frankiz, evit merc'hed leun a startijenn !
Légende : Dañsal a ra Carole ha Sandrine Le Bail en abadenn zañs Treizour.

Lexique

Dañs hengounel / a-vremañ : danse traditionnelle / contemporaine

Kelc'h keltiek : cercle celtique

Pleustriñ : répéter

Gwiskamant(où) : costumes

Sevenadur : culture

Treuzkas : transmettre, transmission.

EN COMPLÉMENT

E galleg, en français

Carole et Sandrine Le Bail participent à la création du cercle Korrigez Ys de Douarnenez, intitulée « Treizour ». Dans ce spectacle original, où chant et danse se mêlent sur scène, les artistes proposent une interprétation contemporaine de pas de danse traditionnelle. Originaires de Tourc'h, les soeurs jumelles avaient fait leurs premières armes avec bonheur au cercle d'Elliant. Aujourd'hui, elles apprécient cette nouvelle approche de la danse qui les déstabilise et les nourrit tout à la fois.